

UR GERIG A-RAOK

E 1997 e oa bet savet ur raktres, anvet *Offspring*, evit kizidikaat an dud yaouank 12-25 bloaz ouzh ar c'hoariva e yezhoù minorelaet Europa. Penaos lakaat muioc'h a dud eus an oadoù-se da zont da sellet ouzh ar pezhioù-c'hoari ha da gemer perzh er strolladoù c'hoariva ? E-pad tri bloaz e voe ul labour krouiñ hag eskemm etre strolladoù eus Wallonia, Iwerzhon, Italia, Luksembourg, Euskadi, Gatalonia, Sveden, Izelvroioù (Bro-Friz), Kembre, Elsaz, Okitania, Breizh (ar Vro Bagan). E miz Here 2000 e voe e Nîmes un emgav etre ar strolladoù, el lec'h ma voe disklêriet un nebeud eus ar pezhioù-c'hoari krouet.

Geweld... Nee ! (Ar feulster... Nann !) skrivet gant Jan Veldman, a voe displeget eno gant ar strollad frizek *Tryater*. Petra eo danvez ar pezh-se ? E 1997 e voe drouklazhet ur c'hrennard gant ur strollad tud yaouank en ur straed eus Ljouwert, kêr-benn Bro-Friz. Fromet ha feuket-bras e voe an dud gant ar feulster-se. Manifestadegoù bras a voe hag aozet ul labour don gant ar c'hevredigezhioù hag ar skolioù. Goulenn a reas ar c'huzul-kêr digant ar

strollad *Tryatet* sevel ha c'hoari ur pezh diwar ar gwallzarvoud-se. El liseoù dreist-holl e voe disklêriet « *Geweld... Nee !* » ha lakaet e meur a yezh “vihan”.

Amañ da heul e vezo gellet lenn an droidigezh vrezhonek am boa savet, gant aotre ar skrivagner. N'eo ket bet displeget da vat c'hoazh e brezhoneg dirak an dud. Salv e vefe graet ur peur bennak, rak ur pezh-c'hoari talvoudus eo e-keñver danvez, hag aes da zeskiñ ha da c'hoari. Skrivet eo bet evit tri c'hoarier nemetken, met en ul lise e c'heller lakaat muioc'h a dud da gemer perzh. Forzh pelec'h e c'hell bezañ displeget, ar gwellañ eo e-kreiz ur sal skol, an arvestourien en-dro d'al leurenn. Bez e c'heller lakaat sonerezh ha dañsoù da heul, rak da geñver ur gouel skol e tremen an traoù.

DA ZIGERIÑ

*An tri aktour, daou baotr hag ur plac'h
yaouank a zo e-barzh ar c'hlas. An
arvestourien a zo war-dro ul lec'h goullo
e-kreiz al leur. Unan eus an tri c'hoarier a zeu
da gomz ouzh an arvestourien.*

AN AKTOUR : Mat ar jeu ganeoc'h ?... ... ha... (*lavaret
anv an tudennoù*) omp-ni. Emaomp o vont da
c'hoari dirazoc'h ur pezh-c'hoari diwar-benn ar
feulster. Ar feulster ha ne servij da netra, un dra
didalvez a-grenn. Petra eo ar feulster ha ne servij
da netra ? Diaes eo gouzout, diaes eo displegañ.
Daoust ha pep feulster n'eo ket didalvez ? Perak
skeiñ gant unan bennak all ? Daoust ha n'emañ
ket ar feulster e gwad an den, evel en ul loen
gouez ; un dra ret evit derc'hel bev ar ouenn, ar
spesad ? Neuze ne vefe ket didalvez ar feulster ?
Daoust ha muioc'h a feulster a zo er bed en deiz
hirio ? N'ouzon ket. 'Pezh a ouzon eo o deus an
dud muioc'h-mui a aon rak ar feulster.

Emaomp o vont da ziskouez deoc'h istorioù gant feulster ; diskouez ivez an dud o sellet ouzh darvoudoù feuls hep klask enebiñ outo. Diskouez pegen skoet e vez an dud gant ar feulster, gant ar gwel eus ar feulster nemetken.

C'hoant hon eus diskouez deoc'h ivez penaos e c'heller enebiñ ouzh ar feulster, terriñ ar feulster.

N'eo ket diskouez nemetken a fell deomp ober : lakaat ac'hanoc'h da gemer perzh, da lavaret ho soñj war-lerc'h an abadenn.

Setu ar c'hoarierien... (*lavaret anv an tudennoù*).

DIVIZ 1

Ar c'hloc'h o seniñ. Poent lein eo. Erru Lucky, Muis hag Amina war al leur en ur c'hoarzhin hag en em hegañ. Gant Lucky eo emañ ar muiañ a drouz, ur plac'h yaouank koant eo Amina (er gouzout ervat a ra). Ur golo-lizher a zo gant Muis, emañ o klask derc'hel anezhañ pell diouzh an daou all.

LUCKY : Muis, Muis, Muis !

AMINA : Ro anezhañ din, ro anezhañ din. Ro anezhañ din, Muis !

MUIS : Ne roin ket !

LUCKY : Ro anezhañ 'ta, Muisig va lellig !

MUIS : Ne rin ket, 'lâran deoc'h !

AMINA : Evidomp-ni hon-tri eo al lizher. Te eo 'peus lavaret da-unan.

MUIS : Lavaret em eus, padal ne po ket anezhañ.

AMINA : Petra 'peus soñj ober gantañ, neuze ?

MUIS : N'ouzon ket c'hoazh. Teurel anezhañ kuit, marteze.

AMINA : Re hir ez ez ganti, 'gav ket dit ?

MUIS : Re hir petra ?

LUCKY : Pebezh plankenn out !

AMINA : Gant piv eo skrivet al lizher ? An dra-se a
c'hellez lavaret deomp, da nebeutañ.

MUIS : N'on ket sot a-walc'h evit lavaret deoc'h.

LUCKY : Deomp kuit, Amina.

AMINA : Ya, deomp kuit. 'Peus ken 'met torchañ da
revr gantañ, ma karez.

MUIS : Bandenn voc'h !

AMINA : Salud !

LUCKY : Salud, salud !

AMINA : Salud, salud, salud !

*(Dismegañsus-kenañ eo Amina. Diaes-bras eo
lakaet Muis. Emañ Amina ha Lucky o vont
kuit)*

MUIS : Gant Kevin eo bet skrivet.

(Souezhet int o-daou)

AMINA (*nervus*) : Gant Kevin ?

MUIS : Ya, ul lizher digant Kevin eo.

LUCKY (*o c'hoarzhin en un doare nervus*) : Oc'h ober
goap emhout, paotr. Kevin ! Ne c'hell ket bezañ
gwir.

MUIS : Sell outañ da-unan.

*(Teurel a ra al lizher e-kreiz al leur. O-zri e
sellont outañ evel ma vefe un tasmant)*

AMINA : Penaos 'peus bet anezhañ ?

MUIS : Gant e dad da gKevin.

LUCKY : Gant tad Kevin ? Gevier a zo ganit, paotr !

AMINA : Pevare e oa ?

MUIS : Dec'h. War-lerc'h ar c'hentelioù.

AMINA : Ya, moarvat !

MUIS : Bez' e oan o vont d'ar gêr gant va marc'h-houarn, unan bennak a oa o tont war va lerc'h gant e garr-tan. A-greiz pep kreiz e oa deut em c'hichen ha digoret ar prenestr. « Te eo Muis ? » Aon am boa bet. « Te an hini eo Muis ? » en doa goulennet adarre. Tad Kevin 'oa.

LUCKY : « Te an hini eo Muis ? » An dra-se en doa lavaret dit ? « Te an hini eo Muis ? »

MUIS : « Ha gwelet a rez Amina a bep an amzer ? » en doa goulennet. « Ha Lucky ? Atav e welez anezhañ ? — Ya, el lise a-wechoù, emeve. — Mignoned oc'h atav ? »

AMINA : Ya, moarvat !

MUIS : « O, mignoned, ya ! » em boa respontet.

LUCKY : Ha da c'houde ? Petra en doa lavaret ouzhpenn ?

MUIS : « N'em eus ket gellet kavout ar re all. Te anavez anezho. Lak anezho da lenn al lizher-se. Gant Kevin eo bet skrivet. » Setu ar pezh en doa lavaret din ouzhpenn.

AMINA : N'eo ket gwir kement-se ! Ne c'hell ket bezañ gwir ! Pevare en defe gellet skrivañ al lizher-se ?

MUIS : Pevare ? A-raok m'oa bet kavet gant e dad, leun e gof a louzeier. A-raok lonkañ al louzeier

eo en doa skrivet al lizher. Kalz a-raok marteze.
Me ne ouzon ket, me.

AMINA : Ne gredan ket ac'hanout. Me ne gredan ket
ac'hanout. Nann, ne gredan ket ac'hanout !

MUIS : Daou lizher en doa kavet e dad en e vurev,
unan anezho evitañ hag evit e vamm, ul lizher da
lavaret kenavo ; hag al lizher-mañ evidomp-ni.

LUCKY : Hag eñ leun e gof a louzeier !

MUIS : War lizher e dad en doa goulennet outañ
reiñ al lizher-mañ deomp. Ne c'helle ket nac'h
ouzh e vab evel-just. « Un tammig diwezhat on o
tegas al lizher deoc'h, met abretoc'h n'am eus ket
gellet ober... » en deus lavaret din. Glac'haret-
bras 'oa.

AMINA : Kalz a druez am eus outañ.

MUIS : N'en doa ket gellet echuiñ e gaoz. Roet al
lizher din ha ploup, kuit.

LUCKY : Lennet 'peus anezhañ ?

MUIS : N'am eus ket. Lenn anezhañ, te ! Evidout-
te eo ivez. Dal, kemer anezhañ, lenn ar pezh zo
skrivet warnañ.

LUCKY : Me, moarvat ! Dit-te eo en deus roet
anezhañ. Ouzhpenn-se e ouzon petra zo skrivet
warnañ.

MUIS : A gav dit ?

LUCKY : Ni eo a zo kiriek penn-da-benn, hag all
hag all... N'em eus ket c'hoant klevet an dra-se
adarre.

MUIS : Foerer !

LUCKY : Te eo ar foerer !

(Tostaat a ra Amina ouzh al lizher. Dastum anezhañ diwar al leur. En entremar e chom...)

MUIS : Digor anezhañ 'ta !

AMINA : Ya, ya.

(Termal a ra atav)

LUCKY : Kae 'ta, Amina !

AMINA : Kaoc'h ki !

(Lakaat a ra al lizher en-dro war al leur ha dont war he c'hiz)

AMINA : N'eo ket ni zo kaoz, eo ! Den ebet n'en deus bountet anezhañ d'ober an dra-se, en desped dezhañ. Mont da lonkañ louzeier ! Sot eo !

LUCKY : Un den digalon eo an den a en em zistruj.
Un den laosk.

DIVIZ 2

*Sonerezh. Lazhet ar gouloù. Gouloù adarre.
Emaomp bremañ war an dachenn mell-droad.
Muis, tennet e lunedoù kuit, a zo deut da
vezañ Kevin. Bloaz a-raok. O c'hoari gant ur
bolotenn emañ.*

KEVIN : Ha setu Romario... Kevin Dijkman 'n eus
aon rak den ebet... Pebezh teknik zo gantañ ! En e
wellañ emañ... Kaset Romario kuit diwar e dro...
Tennañ ! An tenn en toull. En toull ! En toull !
N'eo ket gwir, memestra ! Eo, eo ! Re wir eo ! Ur
tenn en toull, digredus eo !

(Erru Lucky, ur sac'h plastik gantañ)

LUCKY : Hep ! Kevin, gwel 'ta petra zo ganin amañ !

(Sellet a ra Kevin er sac'h)

KEVIN : Evit petra eo ?

LUCKY : Evit petra ? Evit boueta va c'hazh, moarvat !
Ket, evit gouel al lise, emberr.

(Sellet a ra Kevin er sac'h)